



KINNIG LABOUR

Renez-ez DABU Barekaat « Evezhier Kouronkañ »

Adalek ar 25 a viz Here betek ar 1añ a viz Du 2025 – E Berrien (29)

An UBAPAR, Unvaniezh Breizh evit Diorren ar Buheziñ war ar maez, a zo ur rouedad kevredigezhioù e Breizh hag a gas war-raok ar buheziñ ha diorren an tiriadoù war ar maez.

E penn ur rouedad 40 kevredigezh bennak emañ. Labourat a ra war meur a dachenn : an deskadurezh d'an endro, an dudi brezhonek-gallaouek, an niverel hag ar meziantoù dieub, ar vugaleaj hag ar yaouankizoù.

Lidet he deus an UBAPAR he 40 bloaz e 2024. Un aozadur-stummañ gant al label Qualiopi eo. Un aotre da ginnig stummadurioù DABU-DARE e Breizh hon eus. Skoazellet omp gant strollegezhioù hag ensavadurioù.

Stag oc'h eus an deskadurezh pobl ? Bet oc'h bet rener pe renerez ur gevredigezh ? Anavezout a rit bed an ekonomiezh sokial ha kengret ? Anavezout a rit bed ar stummadurioù micherel hag ar stummadurioù DABU ha DARE ? Plijet e vefec'h o labourat en ur rouedad ?

Degemer mat en UBAPAR !

→ PETRA EO HO KEFRIDIOU ?

Bezañ rener-ez ar stummadur DABU :

A-raok ar stummadur DABU

- **Bezañ e liamm gant kernurzhier.ez an UBAPAR.**
Bezañ gouest da respont d'ar goulennoù ur sunvezh d'ar muiañ d'ar goulennoù. Prientiñ ur retro-planning gant dasparzh al labour.
- **Prientiñ ar staj gant ar genurzhierez ha gant ar stummerien ha stummerezed all.**
Skrivañ ar raktres pedagogel e liamm gant raktres deskadurezh an UBAPAR.
Ret e vo raktresiñ un devezh labour a-stroll ur miz pe zaou a-raok ar staj.
- **Mont e darempred gant an den e karg eus al lec'h degemer**
Prientiñ al lojistik a-fed predoù, bod, salioù dieub, kenvevañ gant strolladoù all...
- **Labourat gant ar skipailh pedagogel war al lec'h devezh a-raok devezh kentañ ar staj.**
Echuiñ ar program ha prientiñ mat an devezhioù kentañ. Prientiñ an dafar, an degemer, mont d'ober kefridioù ma vez ezhomm. Aozañ ha kinklañ al lec'h, dizoloiñ an tro-war-droioù,

E-pad ar stummadur : Bezañ kiriek eus aozadur ar staj

- Kenurzhiañ ha buheziñ prantadoù pedagogel, teorikel ha pleustrek. Lakaat ar stajidi da vuheziñ.
- Kemer e karg an aozadur : predoù, bod, merañ an amzer, an treuzdougen, ar c'henweturiñ...
- Treuzkas an dielloù melestradurel d'an UBAPAR : chekennoù, dielloù CAF...
- Bezañ gouest da dapout intrudu, da ginnig traoù.
- Priziañ ar stajidi.
- Bezañ war al lec'h noz ha deiz gant ar stajidi.
- Kemer e karg surentez korf ha surentez spered ar strollad.
- Bezañ aketusoc'h c'hoazh ouzh ar minored.

Goude ar staj : klozañ

- Kemer e karg kempenn al lec'h ha bezañ aketus da adlakaat pep tra evel ma oa.

- Skridaozañ priziadur ar stajidi gant peurrest ar skipailh stummañ
- Chom e liamm gant ar skipailh pedagogel ha gant kenurzhierz an UBAPAR betek ma vefe diskoulmet an darvoudoù, ma vez lod.
- Treuzkas ar fotoioù tapet e-pad ar staj d'an UBAPAR (poltriji eus ar stajidi o defe sinet an aotre nemetken). Implij a raimp anezho evit ar c'hehentiñ hollek. Arabat skignañ ar fotoioù e-maez ar staj (zoken e-touezh hoc'h eskemmoù personel !)

→ DOARE-DEN

Bezañ brezhoneger-ez a-feson (komz, lenn ha skrivañ) : Ar stummadur a vo kaset e brezhoneg penn-da-benn.

Kaout skiant-prenet e bed ar buheziñ (kreizennoù dudi, kampoù vakañsoù)

Bezañ mennet da dreuskas.

Bezañ gouest da verañ ur skipailh hag ambroug an hiniennoù

→ DIPLOMOU

DABU (BAFA) klok pe un diplom kevatal.

Kaout ar varregezh « Evezhier Kouronkañ » a vefe dreist

→ DOAREOU-LABOUR

Kevrad CEE 70€/kriz dre zevezh.

1 devezh prientiñ gopret a-raok ar stummadur

Frejoù-hent restaoliet

Lakaat ho anv (lizher-mennañ ha CV)
da gas dre bostel da sterenn.leguillou@ubapar.bzh adalek bremañ betek an 22 a viz Gwengolo 2025.

Ezhome da gaout muioc'h a ditouroù ?
Pellgomzit da Sterenn LE GUILLOU, e karg eus ar stummadurioù DABU-DARE : 06.70.84.04.76